

GWERZ

Plouisy

an aotrou Sant ANTON, ar manac'h

e chapel war douar Kerizag, en parrozh Plouisi

War don : *Serr-norz.*

DISKAN

O sant Anton trugarezus,
 Galloudus ha madelezus,
 Da Blouisiz, ho pugale,
 Roit o mennad hep dale.



I

'Vit sentin ouz menoz Jezuz,
 Ho peadra ken talvoudus
 Gant ar bewien 'peus lodennet
 Ha war ar plouz 'n em astennet.

II

Ha kimiadet d'ar bed holl
 A oa d'ar c'houlz-se ken diroll,
 'Vit bevan 'n eul lec'h gouez, distro,
 'Kreiz an Ejipt, pell diouz ho pro.

III

C'houi oa paotr yaouank ugént vloaz
Pa 'z ejoc'h da vañac'h gant joa
Da bedin, d'ober pinijenn
Evit ar paour kaez kristenien,

IV

Da ren buhez-hir, peurleuniet,
Peogwir kant pemp bloaz 'peus bevet,
Araok nijal d'ar baradoz
Digor ledan ouz ho kortoz.

V

Ar vrud vat eus ho santelez
'Darnijas dre ar bed a-bez :
Kristen ha pagan diredet
Eus a bell bro 'vit ho kwelet.

VI

An diaoul kounnaret hag oazus,
D'ho tougen d'ar pec'hed mezus,
E wellan pechoù a stignas,
Met ho pedennoù a drec'has.

VII

Er sioulder hag er binijenn,
Er predererez, er bedenn,
C'houi a bleas gant al lezenn
A ra sent bras gant kristenien.

VIII

Hag eus lein an nenvoù breman,
Sant Anton 'skuilh war ar bed-man
Bennozioù kaer ha niverus
'N deus evidomp digant 'Jesuz.

IX

N'eo ket hepken war an dud kaez,
Met ivez war loened ar maez,
E ra selloù trugarezus,
E par e zorn madelezus.

X

Enepe d'ar goriou ar Sant mat
A vez pedet aman dalc'hmat :
Pa vezer gant goriou taget
Gan Sant Anton 'vezer yac'haet.

XI

Ar mammoù diredet a bell
A ra meur 'wech tro e chapell
A bouez o dorn o bugale
'N eur c'houlenn 'vite ar bale.

XII

Gant Sant Joran ha Sant Eler,
C'houi eo skoazell al labourer ;
C'houi hen sikouro da vevan
Da gas da vat treoù ar bed-man.

XIII

Met c'houi kon sikouro dreist holl
Evit hon harz da vont da goll :
Mirit d'hon ene he yec'hed
Hag he glander hag he gened.

XIV

Ha ni 'deuio deiz ho pardon
D'ho pedin, Aotrou Sant Anton,
Pep koulz ar bloaz ni ho pedo,
Hon aluzon ni a roio.

XV

Aotrou Sant Anton, ni ho ped,
Dalc'hit ho kalloud bras meurbet
Da sikour parroz Plouisi,
Skuilhit ho pennoz war bep ti.

Plouisi, 4 a viz eost 1942.

F. T.

Inprimatur :
Brioci, die 7 Augusti 1942.

Y. M. BROCHEN,
Vicarius generalis.